

CHANSON**AN DIAOUL ARC'HANTET.***Var un ton gallec.*

DA viret na stacac'h ho calon
 Re oc'h an arc'hant, Bretonet,
 Clévit eur chanson zo composet,
 Troet a c'hallec en Brezonec,
 Grêt var sujet eul loën arc'hantet,
 Deguizet en form an drouc-speret,
 Hac o sônjal attrap an arc'hant,
 Nomb-a dud a yeas de redeg.

Bez ez oa eus a bep seurt micher
 Hac eus a bep condition
 O redec an Diaoul Arc'hantet,
 Ma venient terri o c'halon,
 A bep etad, nobl ha partapl,
 Boure'hisien, paysantet, hac a bep stat,
 Hac ezech'h, graguez ha plac'het,
 A rede da glasq e attrap.

Eur chirurgien, eun appotiqer,
 Eur medecin, eun avoecat,
 Eun nôter hac eur procureur
 D'e redeg a daol o dillad,
 Hac eur greffier hac eun huissier,
 Eur serjant, eur recor hac eun archer;
 A yea varlerc'h an Diaoul Arc'hantet,
 Eur pifrer hac eun tambouriner.

Eur grossier, eur merceer, eur c'haner,

[2]

A abandonas o bonticou
 Evit sònjat attrap an arc'hant,
 Da vont da redec dre ar ruyou;
 Eur c'hontreporter, eur c'hincailler,
 Eur sculpter, eur broder hac eur pinter,
 A voe varlere'h an Diaoul Arc'hantet
 Dre guement corn a voa en gêr.

Eur marc'hadour lien hac eun drapier,
 Eur c'halvez hac eur menuzer,
 Eur poder sten hac eun ofreber,
 Eur c'hoataer hac eur chodronier,
 Eur fourbisser hac eur güiader,
 Eur brider, eun diber hac eur barbier;
 A red, o sònjat e drouc'ha,
 Emezàn, gant e razouer.

Eur marechal hac eul labourer,
 Eun tosser hac eun armurier,
 Eur c'hivijer hac eur bountaouer,
 Hac eur piqer hac eun tòer,
 Eur piqer-men hac eun tacher,
 Eur mara'hadour a bep seurt liqueur,
 Eur martolod hac eur maltoutier,
 A yê var e lerc'h hac eur c'hoarier.

Eur frippier hac eur frippierez,
 Eur varc'hadourez a besqet,
 Eur marc'hadour soa, eur goulouyer,
 A yas oll dre guêr o redec,
 Eul laonvier hac eur c'honteller,
 Eun operatour hac eur mestr danser,
 Eur filouter neud eo ar goassa,
 Oc'h e redec partout dre guêr.

Eur jardiner hac eur maçoner,
 Ha marc'hadour a bodou pri,

Ar boulanjer , mar guell en altrap ,
 El laqay er forn da zêvi ,
 Eur c'here hac eur c'hemener ,
 Eur pastessier hac eun trêter ,
 A red varlerc'h e clasq e hacha ;
 E ziouesqel a zo re lijer.

Eur varc'hadourez a oranjez ,
 Prun , rêzin hac a figuez ,
 Hac un all a verze avalou ,
 Hac un all a verze crampoez ,
 Eur c'honfiturier , eur sucrier ,
 Eur perugenner hac eun oublier ,
 Eur meliner , mar guell e disout ,
 A lavar e rêy e valeur.

Eur boneder hac ive eur gorer ,
 Hac eul lemmer ar c'hontellou ,
 An ini a ampoeson ar razet ,
 Ar rinder ar chiminalou ,
 Marc'hadour an allumettez ,
 A rede dre ar foul evit nep pres ,
 Gant eun eteo tan hac eur paqad ,
 O sonjal dêvi e vraguez.

Eur c'higuer hac ive eun tavernier ,
 Eur pesqetaer , eur passajer ,
 Eur paperer hac eur pillaouer ;
 Hac eur furic hac eur spazer ,
 Eur violancer , eur biniouzer ,
 Eur flutter hac eur bomharder ,
 A voe cos n'allent qet e baqa ;
 Re a reant o son dre guêr.

Achap a eure an Diaoul Arc'hant
 Eus a guêr da vont var ar meaz ,
 Hac eun usuiller yar e valeur

En deus-en an'ermet en e bres ;
 M'en dalc'h eno betec ar maro ,
 Ma quittas an usuillier e vro ;
 Allas ! o re garet an Arc'hant ,
 Eo bet et an ty oc'h an traon.

FIN.

EXEMPL EUS A UN DEN A JUGON ,

Pehini a verzas e Jubile.

ME ho suppli oll , Bretonnet ,
 Tostaït amàn da glêvet
 Un exempl nevez arruet
 Da volarges , mar c'hententet.

Hoguen allas ! petra oun-me ,
 Hep caout sicour eus an én ?
 Va speret a zo imparfet ,
 Ha va memor a zo troublet.

Guerc'hes divin hac adorabl ,
 Bezit em andret favorabl ;
 Roit din ar graçou necesser
 D'e bublia en Breiz-Izel.

Selaouit petra zo erruet
 Gant tri libertin dirennet ,
 En hostaliri oc'h eva
 En deziou molarjes diweza.

Eun exempl a zo pitoyabl ,
 Ha da bep unan profitabl ,
 Da dec'hel dionz an debochou ,
 Zo caus da galz a valeuriou.

Mevier infam hac obstinet !
 Tosta amàn evit clêvet ,



A d/
 Petra res ebars en laverniou ?
 Coll da ene ha da vadou.

Eus a greiz ma voant oc'h eva,
 Pa voant commancet da domma,
 E teuas eos a Jubile
 A voa gante en o c'hontre.

Bez' e voa unan aneze
 En deveus grêt e Jubile:
 An daou all a zo appellet
 Ur mis gant o c'hôvessoret.

Ar barbar en em bompade
 Da veza grêt e Jubile,
 Hac e voa contant d'e verza
 Evit caout arc'hant da eva.

Unan eus e gamaradet
 Digantàn en deus gonlennet
 Peguement a gousto din-me
 Caout diguenet da Jubile ?

An tirant en deus respontet,
 Touellet gant an drouc-speret:
 Uguent real a dal, emezâ,
 M'am bezo arc'hant da eva.

Na dal get qementse din-me:
 Ur scoët è pris ar Jubile;
 Mar qeres e rêi, emezâ,
 Bremâ ni a ya d'o eva.

Judas a verzas hor Zalver
 Ar pris eus a drêgont diner;
 Hemâ a verz e Jubile
 Evit ur scoët coll e ene!

Done a zo oll-buissant,
 A c'hortos ar pec'her méchant;
 Oc'h traôn ar c'hao pa zisgennas,

Pemp diaubl dezàn a apparissas.

Etouez ar re-màn e voa unan
Hac a gomzas outàn buan.
Mar e c'heus c'hoant da zemezi,
Ma a gavo did eur parti.

Apparissa a ras dezàn
Evel eur femelen ar gaëra,
O sònjal gallout e denti,
Hac er c'his-se e zessevi.

Cetu-én o veza estonet,
O c'hervel e gamaradet;
Me a zo ambarasset amàn,
N'oun dare petra ar re-màn.

Unan dezàn a lavaras:

En hano Doue, gra Sin ar Groas:
Goulen pardon eus da bec'het,
Eus ar c'hrim a c'heus commettet.

Cetu-én oc'h en em groasa,
An diaoul o tisparissa,
Ma zeas da dy ar c'hure,
Da rêy arc'hant e Jubile.

Ar c'hure dezàn a lavaras:

Grêt oc'h eus aze eur faut bras.
Penos! güerza ho Jubile,
Da abusi a c'hraçou Doue?

Oblijet bras oc'h d'ar Verc'hes;
Rac-se, pedit-hi alies:
Dalc'hit memor en ho calon
Poanniou Jesus er bassion.

Emâ a zo un exempl, christenien,
Da dec'hel diouz tud libertin,
Evit ma c'hellimp, goude hor maro,
Adori Jesus en êvou.

FIN.

~~~~~

CHANSON NEVEZ

0000

*Var sujet ur Boulanger a voe foettet gant plac'het.*

Var an ton gallec.

Clevit eur chanson plesant,  
 Grêt da eur Boulanger yaouanq,  
 Pehini en devoa pariet  
 C'hoec'h boezellad hed ouz plac'het.


Driga, driga, driga,  
 O tançal d'o discuiza, or lon lan la.  
 Oc'h eva re a vin güenn,  
 E voa savet en e benn,  
 E teuas c'hoant dezàn da vragal,  
 Ma ped peder plac'h da zançal.  
 Prest e teuas da scuiza, or lon lan la,

Pa voa commancet da domma,  
 En em vant d'o fatiga,  
 O tançal en e blijadur,  
 Mes an danç a voa dreist muzur.  
 Ma rancjont e etrilla, or lon lan la.

Ar c'henta tro a eure,  
 Ar Boulanger a c'hoeze:  
 Commanç a rê da dialana,  
 Hac erfin e teu da goeza,  
 Ma rancjont e etrilla, or lon lan la.

Crial a rê ouz ar plac'het:  
 Qen a vezo varc'hoas differet;  
 Evidon pebes avantur!  
 Elec'h sonjal caout plijadur.  
 Ha c'hoas va etrilla, or lon lan la.

Ar peder blac'h animet,  
 En instant o dens tennet



Driga.

Driga.

Driga.

Driga.

D'ar Boulanjer e vraguezan,  
Ha fouettet e ziou fesqen,  
Evit e etrilla, or lon lan la. Driga.

Pa en deus güclet e fouetta,  
E commanç en em facha,  
Ma tizas unan ar plac'het,  
E c'hoeffou en deus disreguet,  
Scöomp evit e etrilla, or lon lan la. Driga.

N'eu em gave qet erfat,  
E fesqennou leun a c'hoad;  
Eur proces en deus intantet  
Da ober en instant d'ar plac'het,  
Ha testou interrojet, or lon lan la. Driga.

Ar goas a voa bet galvet,  
Ar Boulanjer condaonet  
Da zisqüez pelec'h voa blesset,  
Pe da réy an hed d'ar plac'het,  
Evit e etrilla, or lon lan la. Driga.

Güell eo guenen coll va hed  
Evit gouzaon beza etrillet,  
Evit disqüez va fesqennou  
Leun a c'hoad hac a balastron,  
Gante oc'h va etrilla, or lon lan la. Driga.

Boulanjerien, me ho ped,  
Dioüallit ouz ar plac'het,  
Rac na vec'h ganto etrillet,  
Evel ma zoun-me bet fouettet,  
Ha c'hoas e meus o fact, or lon lan la. Driga.

F I N.